





**ken vreuriez
AR BREZONEG**



TAOLENN AN NIVERENN 35.

1) D'al lennerien	
2) "Lidou evid an <u>absolveñn</u> ", roet da veur a hini war eun dro....	p I
3) An absolveñn : stumm ver	p 5
stumm hir	p 6
4) <u>Pedom evid an Anaon</u> : an Interamant	p 9
5)Lid ar binijenn(evid an overenn)	p I2
6)Pedennou evid ezommou an oll	p I6
7)Liderezh sakrifiz an Aoter	p 20
8)Prefasou	p 22
9)Pedenn Veur II	p 24

Evid kement-tra a zell ouz "Kenkreuziez ar Brezoneg" , her goulenn digand an:

Aotr. Job SEITE, Skol an Aod
29249-GUISSENY

CCP 1738-66 Rennes

Kavoud a reoh azaleg breman:

1) "Livr-overenn" gand eur golo ler drevezet : 50 lur
2) gand eur golo plastik : 36 lur
 gandeur golo paper kalet : 32 lur + mizou kas

2) "Komz Doue en overenn" : Lev'r T : 30 lur

3) "Komz Doue en overenn" Levr A; B; C , pebhini : 20 lur

4) "Ar briedelez" : 8 lur

5) "An Nouenn" : 8 lur

6) Cantiques Bretons du Diocèse de Quimper et de Léon
Livre d'accompagnements (5ème édition) : 33 lur

Troidigeziou aotreet da arnod
evid an eskobti a-berz an Ao.F.Barbu
eskob Kemper ha Leon.

Kemper d'ar 4 a viz meurzh 1975
Visant V FAVE, eskob-skoazeller.

D'AL LENNERIEN.

Eun tammig diwezad evid lavared deoh "BLOAVEZ MAD."

Ra blijo gand Doue taoler e vennoz warnoh, war ho tud, ha war ho labour a-hed ar bloaz nevez !

Setu m'eo staget "Kaierou Kenkreuziez ar Brezoneg" gand o 5ed bloavez gwelloc'h e ve lavared gand o 6ed bloavez p'ogwir eo deiziet an niverenn genta euz an I2 a viz kerzu 1969, da gêñver gouel Sant Kaourantin.

Beteg-henn n'eo ket kel a verr- alan a zo g aneom med kel a nerz nevez hag a fiziañs. Ponner eo bet ar zamm, red e oa mond buan evid herzel ouz an ezommoù kenta. Bremañ e hellom ober eur zao d'or hein p'eo embannet,

en eun doare plijuz, ar pemp levrig red evid overenna d'ar zul ha d'ar goueliou braz. Hag ouspenn ar zakramañchou: ar Briedelez, an Nouenn, ar Bini-jenn. Levrig ar Vadiziant a zo diviet hag a vo adembannet hebdale.

HA BREMAN ?

Sakramant ar Binijenn a vo kavet en niverenn-mañ, en doare ma vez roet da veur a hini war eun dro, gand an absolvenn er stumm berr hag er stumm hir.

En niverenn-mañ ivez e krogom gand: "Pedom evid an anaon". Diou lodenn: el lodenn genta peb tra evid an overenn interamant, urz an overenn hag all, hag an overennou all evid an dud tremenet. En eil lodenn al lennadennou da zibaba. Pa vo embannet an tri pe bevar gaer da zond e vo gallet framma e daou levrig kement a zell ouz an anaon; evel-se e vezint êz da implijoud.

Med amañ c'hoaz e lavarom ar pez on-eus diskleriet dija meur a wech: N'emaom ket a du gand an "toud pe netra" na gand ar "penn-da-benn e brezoneg pe netra". D'or zoñj (?) n'eo ket an tu gwella da vond war araog gand ar brezoneg el liderez er parrezioù. Pa vezer gand eur pad tud troet krenn gand ar brezoneg ne lavarom ket ! D'or zoñj (?) arabad mond re grenn ganti, da genta sila pennadoù brezoneg e touez ar galleg ma n'eo ket prest an ilizad tud da zigemer pe da houzañv ar "penn-da-benn", lakom eur han, pe eul lennadenn, pe eul lodenn euz ar brezegenn, pe eur salm pe eur bedenn.

An dra-ze ne feuko den hag e voazo tamm ha tamm an dud ouz ar brezoneg.

Lakom aviel hir ar bleuniou: e parrez pe barrez ez eus bet lennet tro-ha-dro pennadoù e galleg ha pennadoù e brezoneg. Dre zil ha dre gaer eo mond ganti ha gounid evel-se sperejou ha kalonou an dud. Taoler evez avad da bourchas mad ar pez a zo e brezoneg ! Evel-se o-dezo an dud foug e gand ar brezoneg e-leh kaoud mez evel gwechall. It da Blougerne, da Rumengol.... hag e vo kanet deoh gwech e galleg, gwech e latin, gwech e brezoneg ...ha den na glemm; med ar brezoneg e-neus greet eur gammed vraz war araog.

Eul levrig a ree diouer deom: al levrig overenn evid an dud fidel gand urz an overenn hag eur blokad mad a gantikou e brezoneg, kantikou koz ha kantikou nevez. Hebdale e vo moulet. Pellzo emae e gortoz anezañ.

Eun nevezenti all a zo ganeom. Levr an Aotrou Marrec "Cantiques bretons harmonisés" a oa diviet pe dost. Kenkreuziez ar Brezoneg he-deus embannet al levr a-nevez. Hen goulenn digand Job Seité, 33 lur, kuit a vizou-kas.

Atao war-araog !

K.ar B.

GAND AN ABSOLVENN ROET DA VEUR A HINI WAR EUN DRO.

Beteg nevez 'zo e veze goulennet digand an dud fidel mond hini hag hini da gavoud eur beleg ha da lavared dezañ o fehejou evid kaoud an absolvenn.

Awechou e veze klasket prepari gwelloc'h an dud hag e vezent bodet en iliz. Bez 'e veze lennadennou santel, kantikou, prezegennou hag goude-ze ez ee peb-hini diouz e du da gavoud eur beleg.

Mareou a zigouez ha ne vefe ket êz d'an dud mond hini hag hini da gavoud eur beleg, pa vez kalz tud o klask kovez evel da geñver ar goueliou braz pe ar pardonioù. Aotre a zo neuze, goude beza preparet mad an dud, da rei an absolvenn d'an oll war eun dro, heb ma red dezo aňzav o fehejou araog. Pardonetint, mond a hellont da gomunia. Koulskoude, ar re a gred dezo beza kabluz euz eur pehed braz bennag- dezo o-unan da varn goude beza goulennet kuzul mar de-maint war var- a dle eur poent bennag warlerh mond da aňzav o fehejou braz d'eur beleg. Meur a hini ivez, ha goude ma n'o-defe pehed braz ebed, a glasko gweled eur beleg en e bart e-unan da houlenn ali pe ali evid mad e ene.

Setu ar pezh a zo bet greet dija e lod parrezioù da geñver goueliou Pask (1974) pe c'hoaz gand pardonioù Santez Anna Ar Palud hag ar Folgoad. E Lourd ivez gand ar pelerinajou e miz Gouere hag e miz Gwengolo. E Lourd dreist-oll e oa êsoh hen ober o veza ma chome an dud 5 devez er gêr santel ha ma oa êz dezo kavoud eur beleg d'o zelaou.

Setu amañ penaoz eo bet lidet ar sakramant e Lourd er bloavezh 1974.

AL LIDOU GREET E LOURD (1974)

LIDOU D'AN DIGOR.

(Da genta, eur pennad-amzer gand muzig e-keid ha m'ema an dud o kemer plas en iliz, evid o lakaad erdoare da heulia al lidou gand feiz ha devosion.)

KENTEL VERR.

An Abostol Sant Paol a lavar (II Kor. 5/18,19,20)
"En ano an Aotrou Krist, hoh aspedi a reom: grit ar peoh gand Doue.
Doue an Tad e-neus lakeet ar bed e peoh gantañ dre an Aotrou Krist, en eur denna diwar an dud pouez o fehejou pa lak war or muzelloù-ni komzou ar pardon."

Piou eo eta an Doue-se,
hag a glask beza karet gand an dud ?
Piou eo eta an Doue-se,
hag e-neus karantez evid ar beherien ?
hag a zeu da ober ar peoh ganto,
heb m'o -defe meritet an disterra ?

Daoust hag anaoud mad a reom an Doue-se
a zo ouz or gortoz ?
an Doue-se hag a zo dalhmad digor dor e di ?

Ya, greom ar peoh gand Doue,

Klaskom anaoud gwelloc'h an Tad;

Lezom or halon da veza gounezet gand e vadelez ;

deskom gantañ petra eo kared e-gwirionez,

rag dizesk om war ar poent-se.

Deskom gantañ petra eo beza peher :

beza peher eo gouzoud ez eur karet.

EUR HANTIG.

(Amañ e heller dibaba unan pe unan euz ar hantikou anavezet:

Spered Santel (Levr Kantikou N° I -Le Marrec)

Eun Doue a zeu d'ho kelver : N° 21 (koublad I ha 2)

Poent ez eo deoh, peher, N° 23

PEDOM (Pedenn da zibuna war bouezig dioustu goude ar hantik)/

Ya, Aotrou Doue, bez 'ez oh on Tad,

Bez 'ez oh ar garantez, ar pardon, ar galon zigor.

Morse ne droit kein pa zeu eur paour davedoh.

Ho levenez eo pardoni d'an dud, d'an oll dud....

Taolit eur zell, hirio war ho pobl direded davedoh

leun a joa, leun a fiziañs.

Lavarit warnom ho komz a bardon,

hag evel-se e vo revezet or halon hag or buez.

Dre hras Jezuz Krist, or Zalver,

Eñ hag a zo beo ganeoh hag gand ar Spered Santel da virviken.

AMEN.

KOME DOUE.

(Eur gêrig araog lenn an Aviel.)

Parabolenn ar Mab Prodig a zo anavezet mad. Diskouez a ra deom
beteg pelh'ez a karantez ha trugarez Doue evid ar peher. Doue eo an tad, an
daou vab ez om-ni peherien; rag mar deo kablu ar mab yaouanka, ar mab hena
n'eo ket direbech kennebeud.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUEZ (I5/II-2I)

(gand meur a lenner)

A Jezuz a lavaras c'hoaz:

Eun dén e-noa daou vab.

Ar yaouanka a lavaras d'e dad:

B -"Tad, roit din ar pezh a dle dond din d'am lod".

A .An tad a roas e lod da beb-hini.

Eun nebeud deveziou goude, dastumet gantañ e beadra,

ar mab yaouanka a gerzas d'eur vro pell diouz ar gêr,

hag eno e tispignas e zanvez o vevad en dizurz.

Goude m'e-noe foranet kement e-noa,

e teuas hernez war ar vro,

hag eñ ivez a gouezas en dienez.

Mond a rankas da vevel gand eun aotrou euz ar vro,
hag emañ a gasas anezañ war ar mêz da vêsa ar moh.

C'hoant awalh en-deveze da leunia e gov
gand ar hlosou a zebre ar moh
med dên ebed na roe dezañ.

Neuze e soñjas ennañ e-unan:

- B. Nag a vevelien e ti va zad
o deus bara kement ha ma karont,
ha me amañ o vervel gand an naon !
Dao eo din sevel ha mond da gavoud va zad
hag e lavarar dezañ:

"Tad, pehet am-eus eneb an neñv hag eneb deoh,
N'on ket mui din da veza anvet ho mab;
Kemerit ahanon evel unan euz ho mevelien."

- A. Sevel a reas eta ha distrei daved e dad.
Pell edo c'hoaz pa welas e dad anezañ.
Piket e galon gand an druez an tad a ziredas
da vriata e vab ha da boka dezañ.
Ar mab a lavarar dezañ:

- B. -"Tad, pehet am-eus eneb an neñv hag eneb deoh,
n'on ket din da veza anvet ho mab;
Kemerit ahanon evel unan euz ho mevelien."

- A. Med an tad a lavarar d'e vevelien:

- C. -"Buan, it da gerhad kaerra dillad a zo da lakad dezañ,
gand eur walenn war e viz ha boutou en e dreid.
Digasit al leue lard ha lazit anezañ;
debrom ha greom fest a joa.
Rag, va mab a oa maro hag eñ 'zo deuet beo endro;
kollet e oa ha setu m'eo kavet.

- A. Kregi a rejont d'ober fest.

(Prezegenn verr war an Aviel: ar Mab prodig ne anaveze ket e dad...)

KANTIK d'ar Galon Zakr N° 45

- A. Ar mab hena a oa er park.
En eur zond d'ar gêr, dre ma tostae ouz an ti
e klevas trouz soniou ha dañsou.
Gelver a reas unan euz ar vevelien hag e houlennas outañ:
Petra 'oa kement-se.

- Ho preur, eme ar mevel, a zo erruet,
hag ho tad e-neus laket lazañ al leue lard.
o veza m'e-neus e gavet endro yah ha dibistig."

E kounnar ruz ez eas ar mab hena
ha ne felle ket dezañ mond tre en ti.
E dad a rankas mond er mêz da bourchu warnañ.
Med eñ a respontas d'e dad:

- B. -"Setu nousped vloaz emañ en ho servij,
heb dizenti ouzoh morse;
ha gwech ebed n'ho-peus roet din eur havrig
evid ober fest gand va mignonned.
Padal;kerkent ha m'eo deuet endro ar mab all-se deoh
debret gantañ ho tanvez gand merhed fall,
ho-peus lazet evitañ al leue lard".

- A. Neuze e lavarar dezañ an tad:

- C. -"Va mab, te 'zo dalimad garin
ha kement tra am-eus a zo dit;
med, red e oa ober fest ha beza laouen

4
peogwir e oa maro da vreur hag eo deuet beo endro
kollet e oa ha kavet eo endro."

(Prezegenn verr war an Aviel. Ar mab a oa o veva gand e dad med
ne anaveze ket anezañ.)

KANTIK

Karom Doue da genta N° 10

Eürus an hini N° 11

PEDENN EVID GOULENN PARDON

Ar Beleg:

Bremañ eb intentom gwellob petra eo karantez on Tad euz an neñv...
Hag, e-gwirionez, e hellom e bedi asamblez hag en embrepari da reseo
ar pardon a-berz Doue.

Lenner 1:

Eun tad e-noa daou vab
o hared a ree an eil hag egile....

Lenner 2:

Med an eil hag egile a anaveze fall o zad...
Souezuz eo ! Ankounac'haad karantez divent eun tad...
e basianted, an amzer a ro da hortoz...
Mompaz gouzoud eo evitañ emañ war an douar...
Dizoñjal ar garantez... Dizoñjal ez eur karet....
Penaos e vez kavet kement-se en or buez ?

(Sioul eur pennad)

KANTIK:

Meulom oll N° 12

Lenner 1:

Ar yaouanka a zastumas kement tra e-noa....Mond a reas d'eur vro bell...

Lenner 2:

Ren ar vuez hervez ar faltazi...
Ober ar penn an-unan heb delher kont euz den nag euz netra...
Stoui dirag doueou-faoz: arhant, galloud, plijadur...
Soñjal n'eus da ober nemed lakaad ar re all da blega.
O gwaska ma vennont herzel....
Sacha davedor an-unan peb tra...
Deom'al lodenn vrasa...
En em derna an-unan ar gwella ma heller...
heb hemer ar riskl da drei gand ar teorien...
Daoust ha n'eo ket aze ar pezh a reom aliez ?

(Sioul eur pennad)

KANTIK:

An ene devot da Jezuz N° 9

Lenner 1:

Mond a ran da zistrei da di va zad...

Lenner 2:

N'eo ket êz añaos emañ ar gaou ganeor...
N'eo ket êz enebi ha stourm...
ouz ar gaou greet deom pe d'or breudeur....

(Sioul eur pennad)

Lenner 1:

Hag eñ pell c'hoaz, e dad a welas anezañ
hag a redas d'e vriata ha da boka anezañ...

Lenner 2: Ober ar peoh gand ar re all a galon vad...
 Lezel ar re all da ober ar peoh ganeom...
 Pardon heb marhata...
 Kredi eo Doue bepred prest da ober digemer deom
 pegen braz peher ma vem...

(Sioul eur pennad)

KANTIK: Kaer ha plijuz meurbed....."

(Breiz a gan 5 N° I
 pe (Le Marrec N° I48

Lenner 1: Va mab, red e vefe bet dit beza laouen
 peogwir da vreur , hag a oa kollet, a zo kavet endro...

Lenner 2: Doue e-neus karantez ivez evid ar re all
 evid va enebour...
 Kredi e bolontez vad ar re all,
 er vad a zo enno, ha pa vefent pell diouzm....
 Nompaz beza kaled outo pa fell dezo distrei...
 Kredi e kar Doue an oll dud....

(Sioul eur pennad)

KANTIK: Ar baradoz N° 34 ha 35

Ar rener: Ar re ahanoh o-neus c'hoant, a zo bremañ o vond da reseo an absolvenn
 roet d'an oll asamblez. Pardon Doue a zo eun dra a bouez braz hag a
 houlenñ euz or perz trei kein d'ar pehed, rapari ar gaou on-eus greet,
 ha mond da gavoud eur beleg ma kred deom on-eus pehejou braz war ar
 houstiañs, pe mar on-eus c'hoant kaoud aliou evid ren mad or buhez.

Klaskom ivez petra a hellfem da ober evid diskouez sklêr
 on-eus c'hoant da ober ar peoh gand Doue ha gand or breudeur....

Ar beleg: Chomom sioul eur pennad asamblez...
 Ar re o-neus c'hoant reseo an absolvenn a lavaro ganin: "Me 'añzav
 dirag Doue..." hag e hell stoui o fenn.

Me 'añzav dirag Doue oll-halloudeg
 ha dirazoh, va breudeur,
 am-eus pehet braz
 dre zoñj, dre gomz, dre ober ha dre jom heb ober.
 Rag-se e houlenñ digand ar Werhez Vari,
 an êlez hag an oll zent
 ha diganioh, va breudeur, pedi Doue evidon.

AN AN ABSOLVENN (Daou stumm diwar ar steuenn halleg bet kavet gand Rom d'an 21
 a viz Here 1974)

<u>Stummverr:</u>	Ra zeuio Doue an Tad da ziskouez deoh e vadelez. Dre e Vab maro hag adsavet da veo e-neus greet ar peoh gand an dud. Kaset e-neus ar Spered Santel, evid ma vo pardonet ar pehejou. Dre servij an Iliz, ra blijio gand Doue rei deoh ar pardon hag ar peoh. Ha me, en ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel a ro deoh ar pardon euz hoh oll behejou. AMEN
-------------------	--

Stumm hir: Doue an Tad, n'eo ket maro ar peher ema o klask
med ma tistroio davetañ ha m'e-no buez.
En e-neus or haret da genta,
Kaset e-neus e Vab er bed
evid ma vo salvet an oli drezañ
Plijet gantañ diskouez deoh e garantez
ha rei deoh ar peoh.

AMEN

An Aotrou Krist, e-neus or pehejou kaset d'ar marc,
a zo deuet d'or zavetei en eur adsevel da veo:
lakeet e-neus ar Spered Santel da ziskenn war an Ebestel
evid dezo kaoud ar galloud da bardoni ar pehejou
Ra zeuio or Zalver e-unan,
dre ar zervij a zo bet fiziet ennom
d'ho tilivra dicuz an droug
ha d'ho karga euz ar Spered Santel.

AMEN

Ar Spered Santel, skoazell ha divern evidom
a zo bet roet deom evid ma vo pardonet ar pehejou
ennañ e hellom tostaad ouz an Tad.
Plijet gand ar Spered Santel sklerijenna ha gwalhi ho kalonou
hag evel-se e helloh embann burzudou
an hini e-neus ho kalvet
euz an deñvalijenn d'ar splann m'eo e sklerijenn.

AMEN

Ar beleg c'hoaz: Va breudeur,
peogwir e-neus Doue greet deom beza e peoh gantañ,
ni a dle d'or tro ober ar peoh gand ar re all,
ha pardon Doue a dle tremen,
dre ar pardon a room d'ar re all.

Va breudeur, roit (pe room) ar peoh an eil egile
en eur starda on daouarn an eil d'egile pe
en eur boka an eil d'egile mar demaom etre tud kar.

KANTIK: Maer ha plijuz meurbed...

Ar Beleg: Ha bremañ, va breudeur ha va c'hoarezed,
kanom da Zoue asantlez
ol levenez hag on anaoudegez vad.

KANTIK: An Ene devot da Jezuz N° 9 (eur houblad hag an diskan)

Tad ken hegarad en or heñver,
Just eo kana deoh meuleudi
rag ne skuizit morse o pardoni
Ni a zo tud a nebeud a feiz,
ha koulskoude e kredit ennom...
Plijoud a ra deoh lakaad ho karantez etre on daouarn...
evel-se eta e fell deom kana meuleudi deoh.

(koublad all ha diskan euz ar
memez kantik.)

Meuleudi deoh, c'hwi tad ar mab prodig,
ha tad e vreur hena.
Ne glaskit ket rendael na gand unan na gand egile,
med o hared a rit o-daou, evel m'emaint.

Kredi a rit d'ar yaouanka,
 hag ho karantez a ro dezañ hardisegez da zistrei...
 Redeg a rit en arbenn d'an hini a oa kollet
 hag e zigemer a rit gand joa.
 Setu perag meuleudi deoh !

(Koublad all ha diskan)

MONd a rit ivez en arbenn d'ar mab hena,
 mond a rit d'e bedi,
 n'eus ganeoh nemed komzou a garantez,
 sikour a rit anezañ da gemer perz e joa an oll,
 Setu perag, meuleudi deoh !

(Kantik)

Ya, meuleudi deoh, Tad an dud, Tad Jezuz Krist,
 Kement a garantez ho-peus evid ar bed
 ma roit deom, hirio c'hoaz, ho Mab,
 evid renta buez endro d'ar re a oa maro
 evid kaoud endro ar re a oa kollet,
 evid dastum an oll hag o unani er peoh
 unani ar re oll a oa disparti etrezo
 evid ma hellfent asamblez kana deoh meuleudi.

(Kantik)

Da echui, Kan pe vusik.... (Meulom oll N° 12)

KAER HA PLIJUZ MEURBED.....

(Ton Breiz a gan 5)

Diskan:

Kaer ha plijuz meurbed
 eo beva asamblez
 evel breudeur
 unan e skoulm ar garantez.

1. Ar garantez pebez teñzor !
 ganti ar galon a zigor;
 eur berad eoul war ar gouli
 ha levenez da beb-hini
2. Ar garantez eo ar hlizenn
 euz an neñv bemdez e tiskenn
 he nerz a laka da vleunia
 ar vertuziou an uhella.
3. Ar garantez a zo bennoz
 o koueza euz ar baradoz
 diveret euz kalon Doue
 a zo ganti peoh ha bue.

... ..
... ..
... ..
... ..

... ..

... ..
... ..
... ..
... ..

... ..
... ..
... ..
... ..
... ..
... ..
... ..
... ..

... ..

... ..

... ..

... ..
... ..
... ..
... ..

... ..

... ..
... ..
... ..
... ..

... ..
... ..
... ..
... ..

... ..
... ..
... ..
... ..

PEDOM EVID AN ANAON

" BARADOZ DUDIUZ

BRO AR ZENT EO VA BRO."

AN INTERAMANT.

I--AN DIGEMER EN ILIZ: (Requiem) Ton: "Joa d'an Anaon." P.I (Le Marrec N° 187)
(I)

Diskan: D'an Anaon roit, va Doue
Pech an diskuiz 'vid atao,
Ha sklerijenn ho paradoz
Da bara bepred warno.

I-Deuit aman, Sent ha Sente zed Doue,
Direit oll, Elez an Aotrou
Kemerit an ene kristen-man,
evid e zougen dirag an Aotrou Doue.

2- Lezit digemeret gand ar Zalver
e-neus galvet ahanoh;
da gichen Abraham, e-touez ar Zent,
Bezit kaset gand an êlez.

3-Eun dra gaer eo kana deoh meuleudi
en ho kêr zantel, Aotrou Doue
'Kreiz ho Rouantelez.

4-Dond a ra peb dên d'ho kavoud
en eur stleja an droug greet gantañ;
Re vraz eo pouez or pehejou 'vidom
Med, c'hwi 'oar o fardoni.

2-KAN D'an DIGOR:

A)-Ra llijo gand Doue digeri da A. (pe: d'on tud eet da anaon)
dor e varadoz;
evid ma 'h antreo (antreint) en e wir vro (en o gwir vro)
e-leh n'eus mui maro ébed,
e-leh ma skedo an eürusted peurbaduz.

B)-Setu komzou Jezuz, or Zalver:
-"Deuit, tud benniget gand va Zad,
resevit en heritaj ar Rouantelez a zo bet pourchaset evidoh
azaleg krouidigez ar béd."

(I) -Bez 'e haller ivez kana an diskant war don "Eun Doue a zeu d'ho kervel" N° 21
pe "A vianig am-eus pehet " hag ar houbladou evel eur salm.

(N°37)

- Al levrig "JOA D'AN ANAON" a gaver e ti Roger Abjean, presbital Sant Vaze,
30, rue Basse. 29210 MORLAIX; ennañ peb tra evid an overenn interamant e
brezoneg.

- Ten ar hantikou implijet aman a vez kavet e levr an Ao.Marrec (5è éd.)

C)--(en amzer-Fask I Tes. 4/I4)

Evid gwir, ma kredom eo marvet Jezuz
hag adsavet da veo,
Kredom kenkoulz all
e lakaio Doue da adveva gand e Vab
ar re a zo marc e Karantez Jezuz.

3-SALUD AR BELEG:

Epad ma ra an oll sin'ar groaz ar Beleg a lavar:

-En ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel

Evid saludi an dud e kemer unan euz ar stummoù-mañ:

- a) -An Aotrou Doue ganeoh;
An oll: ha gand ho spered.
- b) Va breudeur, ra zeuio Doue an esperañs
da startaad ennoh jo feiz ha da rei deoh ar peoh,
An Aotrou Doue ra vc bepred ganeoh;
An oll: ha gand ho spered;
- c) Plijet gand Doue an Tad
ha gand or Zalver Jezuz Krist, e Vab,
skuilla warnoh bennoz ha peoh.

An oll: Meuleudi da Zoue, Tad or Zalver Jezuz Krist.

Ar beleg a lavar eun nebeud komzou a zigemer, eun dra bennag diwar ar pez
a zo amañ warlerh: delher kont euz an doare tud a zo en iliz.

Kristenien, mar demaom bodet amañ en iliz

- 1- eo evid diskouez d'an dud a zo e kañv or harantez (or mignonij) ar perz
a gemerom en o foan...

(ober a heller amañ ano euz ar pez a zinifi ar bokedou (I), ar
homzou pe al liziri a gengañv, an overennou hag ar servijou lakeet evid an
den marc, etc....)

- 2-eo evid disklêria ne vez ket torret gand ar maroal liammou a garantez
(a vignonij) a zo bet oh unan ahanom a-hed or buez.

(Amañ e heller menegi ar pez a zo bet oh unani an den eet da anaon
gand an dud a zo en iliz: famill, micher, etc....)

- 3-eo evid pedi, evid soñjal erhom on-unañ, evid selaou komzou Doue
(evid kemer perz e sakramant an Aoter)

- 4-eo evid lakaad en or spered e talh soñj Doue euz kement a zo bet a vad hag a
gaer e buez N.... ha goulenn digand Doue ober digemer vad dezañ.

(I)Evid ar bokedou e heller lavared:

Ar bokedou digaset amañ a zo merkou a garantez hag a zoujañs;
lavared a reont, en o yez, santimañchou ar galon.

LIDOU DA ZIBABA.

AR SKLERIJENN.

N° 4:

Elumi a reom ar goulou-mañ
 e-kichen N...or breur (pe or c'hoar)
 Ahanoh, Aotrou Doue, e teu ar sklerijenn-se
 eñkreiz on deñvalijenn.
 Ra zeuio da sklerijenna or buez
 ha da rei deom eun esperañs nevez.

pe c'hoaz:

Aotrou Doue, On Tad,
 Maro N....(or mignon, or mignonez, deom)
 ken skoet all m'om-bet gantañ
 a zigas da zoñj deom n'eus ahanom nemed tud.

hag ez eo berr or buez
 Med, evid ar re a gred en ho karantez,
 Ni a oar n'eo ket echu peb tra gand ar maro,
 Chom a ra ganeom esperañs bugale Doue.
 hag e sked evidom sklerijenn an Aotrou Krist,
 adsavet da veo, trehet gantañ ar maro.

N° 5:

AR GROAZ.

(Kroaz kinniget gand ar famill)

Ar groaz-se, kinniget ganeom,
 he lakaad a reom bremañ war an arched(an arh)
 Salver Jezuz, bezit soñj
 ho-peus or haret beteg mervel evidom.
 Ra vo eta evidom ar groaz-se
 ar merk euz or harantez evid N...
 hag euz ho karantez evidom.

(Kroaz ar brosesion)

An Aotrou Krist e-neus or haret
 beteg mervel evidom.
 Ar groaz a zigas soñj deom a gement-se.
 Ra vo evidom ar merk euz e garantez evid N....
 hag euz e garantez evid peb-hini ahanom.

N° 6:

AR WISKAMANT.

(evid eur beleg, eun avieler, paotr pe verh nevez greet gantañ e bask kenta.)

(evid beleg pe avieler)

Aotrou Doue,

Taolit euz zell a drugarez war ho servijer:

Douget e-neus ar wiskamant

sin euz ar vuez hag ar joa e-neus kavet en ho karantez(en ho mignonij)

(lakaad a reer ar gamz war an arched)

Douget e-neus ar stol

pa halve an dud

da gemer perz gantañ en ho para hag en ho komzou.

(lakaad a reer ar stol war an arched)

Ra zigouezo hirio dirazoh

nêteet a beb pehed

gwisket gantañ dillad-gouel ho mignoned.

(evidpaotr pe verh nevez greet gantañ e bask kenta)

(lakaad a reer, heb lavared gêr, ar wiskamant gwenn war an arched)

Aotrou Doue, taolit eur zell a drugarez war N...

Douget e-neus ar wiskamant-se

sin euz ar vuez hag ar joa e-neus kavet en ho karantez(en ho mignonij)

Ra zigouezo hirio dirazoh,

warnañ dillad-gouel ho mignoned.

N° 7

LID AR BINIJENN (evid an overenn)

E leh an deare pedennou a vez greet peurlies a heller implijoud ar re a zo amañ warlerh.

N° 7

Salver Jezuz,

Dre ho kwad skuillet war ar groaz

e teuit da zilamm or pehejou.

Ho pet truez ouzom !

R/ Ho-pet truez ouzom ! (Marrec N° 187)

Aotrou Krist,

dre hoh adsav euz ar béz,

ho-peus on diframmet diouz ar maro.

Ho pet truez ouzom.

R/ Ho-pet truez ouzom !

Salver Jezuz,

en eur antreal er hloar

e tigorit deom dor ar vuez.

Ho-pet truez ouzom.

R/ Ho-pet truez ouzom !

N° 8

pe c'hoaz:

Troom warzu an Aotrou Krist gand fiziañs.

Salver Jezuz, Mab Doue deuet er bed
da gemer perz en or poan hag en ol levez.
Ho-pet truez ouzom.

R/ Ho-pet truez ouzom !

Aotrou Krist, maro war ar groaz
evid treshi ennom ar maro hag ar pehed
Ho-pet truez ouzom.

R/ Ho-pet truez ouzom !

Salver Jezuz, adsavet a douez ar re varo,
evid digeri deom hent ar vuez.

HO-pet truez ouzom.

R/Ho-pet truez ouzom!

N° 9

pe c'hoaz:

Doue Santel, Doue Santel ha Kreñv
Doue Santel ha Peurbadel. Kyrie eleison.

C'hwi hagho-peus gouzañvet evidom
war ar groaz; Christe eleison.

Bezit soñj ahanom
pa deuh en ho Rouantelez. Kyrie eleison.

N° 10 Ar Beleg:

Plijet gand Doue oll-halloudeg
kaoud trugarez ouzom;
pardon deom or pehejou,
ha kas ahanom d'ar vuez peurbaduz. Amen.

N° II

PEDENN D'AN DIGOR.

Kavet e vo pelloh warleh, eun nebeud pedennou, da veza dibabet hervez
an degouezou. Med, da genta, pedennou hag e hello beza lavaret, pa ne vo ket a
dro da zibaba e -tuez ar re all.

Aotrou, grit deom intent da degemer ho komz
e-doare ma kavim enni
sklerijenn en on tristidigez,
startijenn ar feiz pa zavo douetañs ennom
ha nerz-kalon da dremen ar mare poaniuz-mañ
Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered-Glan,
a oll-viskoaz da virviken. R/ AMEN

(I) Ma vez kanet e heller ivez kemer : Kyrie eleison.

N° 12

pe c'hoaz:

Salver Jezuz,
 Plijet eo ganeoh e teufe d'or boda asamblez
 an hini end-eeun e-neus or huiteet nevez 'zo
 Peb-hini a oa eet diouz e du war e dachenn,
 hag on-neus dilezet ol labour
 evid dond da gemer perz e poan ar re all.
 C'hwil hohunan ho-peus bevet eur vuez a zén evel dom;
 grit d'or halonou beza digor
 da sklerijenn ho kemennadurez,
 ha d'an testeni ho-peus roet euz ho karantez
 evid an dud.
 Renit ahanom evel-se tostoh da N...
 tostoh ivez deoh-hwi
 c'hwil hag a zo beo, hirio ha da viken.

R/ AMEN

N° 13

pe c'hoaz:

Aotrou Krist, or Zalver,
 Setu amañ, bodet en ho ti,
 mignoned N... en hag a zo o paouez or huitaad
 Er mare-mañ a gant
 e troom warzu ennoh:
 Deuet oh da vev ha da vervel er bed-mañ
 evid m'e-no peb den ar vuhez ennoh.
 Lakit an esperañs da ziwan en or halonou.
 ni ho ped,
 c'hwil hag a zo beo gand an Tad hag ar Spered-Glan,
 bremañ ha da viken.

R/ AMEN.

N° 14

pe (er nêz euz an amzer Fask.)

Aotrou Doue, on Tad,
 n'eus nemedoh hag a hellfe beza treh d'ar maro
 ha rei eur vuhez ha ne varv ket.
 Ho servicher N... or breur
 a zo antreet gand Jezuz e kousk ar maro,
 Med, ni a gred ho-peus adsavet Jezuz
 evid ma savo ivez or breur euz a varo da veo.
 Setu perag ho pedom gand fiziañs.
 Roit dezañ al levez da veza unanet gand ar Hrist
 e mister e adsao da veo.

En hag

N° 15

pe c'hoaz:

Aotrou Doue, na zizoñjit ket petra oh evid ho tud;
 eun Tad troet da bardoni
 eur mignon bepred troet da garet.
 Selaouit ahanom pa zeuom d'ho pedi.
 evid ho servicher N... or breur
 (ho servichérez, or c'hoar)
 emaoñ o paouez gelver davedoh
 Epad m'e-neus (m'he-deus) bevet en on touez
 ez oh bet e esperañs hag e feiz :
 Roit bremañ dezañ (dezi) digemer ganeoh
 er plas ho-peus pourchaset;
 Digorit dezañ (dezi) ho tivreh ha roit dezañ (dezi)
 an eürusted n'hell beza distrujet gand netra
 Dre Jezuz Krist.....

N° 16

Doue a garantez, mammenn peb karantez
 c'hwi eo ho-peus silet en or halon karantez
 evid ho servicher N...
 ha setu perag ho pedom gand fiziañs:
 felloud a ra deoh pardoni d'ar beherien
 ha buez a roit d'ar re a zantellait.
 Plijet ganeoh rei d'or mignon al levenez
 a brometit d'ho tud fidel.
 Dillivrit anezañ da vad
 euz kement hen dalhfe pell diouzoeh
 ha roit dezañ ar hras da vond d'ho kweled
 da zeiz an adsao da veo
 Dre Jezuz Krist.....

N° 17

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo bepred troet
 da gaoud truez ha da pardoni
 ho pedi a reom stard evid ho servicher (servichérez) N....
 emaoñ o paouez gelver da guitaad ar bed-mañ;
 peogwir ez oah e esperañs hag e feiz
 resevit anezañ en e wir vro
 ha roit dezañ ar hras da gaoud lod
 en eürusted peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist.....

N°18

(Epad an amzer K. Fask.)

Aotrou Doue, c'hwi hebken a hell rei deom fiziañs
 pa gred deom ez a an treh gand ar maro
 Lakit hirio da greski or feiz
 en ho Mab Jezuz adsavet a-douez ar re varo;
 Startait an esperañs on-eus eh adsavo a varo da veo
 N... Ho servicher hag or breur.
 Dre Jezuz Krist.....

N°19

LIL AR GOMZ.

Al lennadennou a vo kavet e fin al levr.

Pouez braz he-deus al lodenn-mañ. Embann a ra mister ar Pask, maga
 er halonou an esperañs d'en em gavoud, eun devez, assemblez e Rouantelez Doue.,
 diskouez a ra ivez eo unanet stard ar re veo hag ar re varo, poulza 'ra an dud
 da vev kristen, e karantez Doue.

Ma n'eus ket a overenn e vo lavaret dioustu ar bedenn evid ezommou
 an oll, goude lid ar gomz, hag e vo echuet gand eur bedenn pe gand ar Pater
 Noster.

Goude e vo tro ar Himlad diweza a gavor pelloh.

PEDENNOU EVID EZOMMOU AN OLL.

N° 21

Da zigeri:

-1-

Pedom va breudeur ker, evid silvidigez ar re veo hag ar re varo
 en em erbedom gand feiz ouz Doue an Tad oll-halloudeg
 eñ hag e-neus adsavet a-douez ar re varo e Vab unganet Jezuz Krist.

pe: Bremañ va breudeur, pedom oll a-unan an Aotrou, on Doue,
 n'eo ket hebken evid or breur (c'hoar) eet da anaon
 med ouspenn, evid an iliz
 evid ar peoh dre ar bed hag evid or zilvidigez.

R/. Ho-pet soñj, Aotrou, euz ho madelez.

(pe eun disken all bennag)(I) (Marrec N° 181)

Intañsionou:

Evid A... hag evid an dud eet da anaon
 on-eus anavezet (ha karet)
 Pedom an Aotrou. R/.

Evid or mignoned a zo hirio e kañv
 hag evid ar re oll a zo glaharet.
 Pedom an Aotrou. R/.

Evid ar re a zo sammet ha fallgalonet,
 evid ar re n'eus dén war o zro d'eo sikour,
 pedom an Aotrou. R/.

Evid ar re a laka o foan da zikour o nesa,
 Pedom an Aotrou. R/.

Evid ar re a gred en adsao da veo,
 hag evid ar re a glask ar wirionez,
 Pedom an Aotrou. R/.

Evidom oll bodet amañ,
 evid ar re n'o-deus ket gelled dond,
 hag ar re n'o-deus goulennet diganeom pedi evito.
 Pedom an Aotrou. R/.

Pedenn:

Aotrou Doue, c'hwil hag ho-peus karantez evid an oll dud,
 Plijet ganeoh e teufe pedenn hoh iliz
 da veza talvouduz evid silvidigez ar re veo
 hag ar re varo. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

(I) Selaouit, Aotrou Doue

Pedenn ho pugale. (Gwir vugale ar werhez . N° 91)

Nº 22

Pedom gand fiziañs Doue on Tad oll-halloudeg
e-neus adsavet a-douez ar re varo
e vab unganet Jezuz Krist.

pe:

Va breudeur, bodet amañ endro d'eur famili e kañv
pedom oll a-unan
evid silvidigez peurbaduz an hini emañ o ouela dezañ(dezi)
evid ar re oll a zo eet da anaon
hag evid frealzidigez ar re a jom war o lerh.

Intañsionou;

Evid or mignon-(ez) eet da anaon,
ma kavo plas e ti an Tad
evid ar vuez peurbaduz
Pedom oll asamblez.

R/. Euz ho madelez, Aotrou,
ho-pet soñj bepred.

Evidom oll amañ bodet,
ma vo or feiz treh d'ar glahar
ha ma ne vo ket mouget on esperañs gand or hañv.
Pedom oll asamblez. R/.

Evid ar re a zo sammet gand ar boan,
ma ne gredo ket dezo morse beza dilezet gand Doue.
Pedom oll asamblez. R/.

Evid an oll dud,
ma feunt da vev war an douar muñh-mui evel breudeur.
Pedom oll asamblez. R/.

Evid an Iliz, or mamm,
ma roio da anaon d'ar bed
eo an Aotrou Krist mestr ar re vev hag ar re varo.
Pedom oll asamblez. R/.

Pedenn:

Aotrou Doue,
c'hwi hag a ro ar zilvidigez d'an oll,
ha ne fell ket deoh ez afe eun unan da goll
selaouit ouz pedenn ho pugale.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

pe:

Aotrou Doue, peogwir e-neus ho Mab on dasprenet
o vervel war ar groaz,
Plijet ganeoh selaou ouz or pedenn:
Roit deom oll ar grasou on-eus ezomm anezo
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

Nº 23.

Va breudeur, kasom or pedenn c'hweg ha kaloneg war-zu an hini e-neus lavaret:

- "Bez 'ez on an adsao da veo hag ar vuez an neb a gred ennon, ha goude ma vefe maro, a vevo."

pe: Asamblez on-eus selaouet komz Doue lavaret a ra deom kaoud esperañs.
Kasom bremañ or pedenn warzu Doue.
Oll unan.

Intañsionou.

Pedom evid A.....

hag evid ar re oll eet da anaon:

-En ho madelez, Aotrou, pardonit dezo o fehejou.

R/. Warzu ennoh Aotrou

e kasom or pedenn.

- Roit digemer da gement o-deus greet a vad er bed mañ.

R/.

- Roit dezo o lod er vuez peurbaduz.

R/.

Pedom c'hoaz evid ar re oll a zo hirio e kañv:

-Roit nerz-kalon, Aotrou, d'ar re a zo er boan.

R/.

-Ra zeuy ho karantez da frealzi an dud dispartiet.

Pedom evidom on-unan hag evid an oll dud:

R/.

-Aotrou Doue roit ar peoh d'ar bed.

R/.

-Lakit da greski or harantez evid or breudeur.

R/.

-Grit deom beza unanet e levez an adsao da veo.

R/.

Pedenn:

Aotrou Krist, c'hwi hag a zo amañ
e-touez ar re a gred, bodet en hoh ano,
Selaouit ouz o fedennou;
plijet ganeoh seveni o goulennou
c'hwi hag a zo Doue,
Beo gand an Tad hag ar Spered Glan
a-oll-vizoaz da virviken. AMEN

pe:

Aotrou, on Doue,
c'hwi ho-peus or haret beteg rei ho Mab,
evid ne'z ay da goll hini ebed euz ar re a gred ennoh
hag evid m'o-defe oll perz er vuez peurbaduz.
Deuit war zikour or zempladurez
ha lakit da greski er feiz
ar re oll a laka p fiziañs en ho karantez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

Evid ar re a houzañv poan hag ar re a stourm da herzel ouz ar boan.

1-Evid ar re a zo war o zremenvan,
ma kavint en o hichen eur mignon
d'o zikour da drei ouz Doue,
Pedom an Aotrou Doue.

2-Evid ar re glañv kollet ganto peb fiziañs da baree,
evid ar re a houzañv poan hag a zo fallgalonet,
pedom an Aotrou Doue.

3-Evid ar re a zo wardro ar re glañv,
hag a intent outo,
Pedom an Aotrou Doue.

4-Evid an dud desket hag ar vedisined;
ma teuo Doue d'o zikour
da herzel ouz ar hleñved hag ouz ar boan.
Pedom an Aotrou Doue.

Evid an anaon.

5-Evid ar re a gav ar maro o sikour ar re all;
ma kavint eñkichen Doue
an eñrusted hag ar peoh.
Pedom an Aotrou Doue.

6-Evid ar re o-deus roet o buez evid o bro;
ma teuo Doue da rei dezo eur geer a zigoll.
Pedom an Aotrou Doue.

7- Evid ar re on-eus bet nevez 'zo kelou euz o maro
(maro diwar goust ar brezel,...diwar goust fallagriez an dud)
diwar goust eun darvoud bennag...
Pedom an Aotrou Doue.

8-Evid anaon ar barrez,
dreist-holl evid ar re a zo eet da anaon
er zizun-mañ (er miz-mañ, er bloaz -mañ)
Pedom an Aotrou Doue.

LIDEREZ - SAKRIFIS - AN - AOTER

Divizet e vo gand ar gerent pe e vo overenn pe ne vo ket. Gwelloc'h e vo kaoud overenn mar dema al lodenn vraz euz an dud a zo en iliz e tu da gemer perz e gwirionez en overenn ha da reseo Korv ha Gwad or Zalver.

Ma ne vez ket a overenn e-kerz an interamant e vo gallet he lavared eun deiz all bennag, dreist-oll ma vez êz boda ar gerent nesa pe ar barrez-ziad tud.

Evid an overenn dibaba ar pedennou, lennadennou, prefasou euz ar gwella e-touez ar re a zo kinniget, hervez an digouezou pe an doare tud a zo en iliz.

Warlerh ar bedenn goude ar gomunion e vo laket dioustu lid ar himiad diweza a vo kavet amañ warlerh. Mema ar hiz er barrez da vond oll d'ar vered da heul ar horv e hellfed lavared eno pedennou ar himiad diweza. Neuze e vefe savet kuit ar horv d'e gas d'ar vered dioustu warlerh ar bedenn goude ar gomunion.

N° 25. LID AR PROVOU

Ar beleg a laka war an aoter ar bara hag ar gwin.

KAN AR MINIC.

Diskan: Kinnigom oll ar zakrifis
Gand or Mamm zantel an Iliz,
Sakrifis divin Or Zalver
En em ginnig war an aoter.

- | | |
|---|--|
| <p>I- E sakrifiz an Overenn
Jezuz a ra d'e veleien
Nevezi 'n eun doare dispar
Sakrifis meur Menez-Kalvar.</p> | <p>2- Ouz an anaon, Salvez Jezuz,
Grit ivez-er zell truezuz
Roit dezo, dre 'n overenn
Ar pech a bado da viken.</p> |
|---|--|

+ war ar bara: Bennoz deoh, aotrou Doue, mestr ar bed,
rag euz ho madelez on-eus bet ar bara-mañ
a lakom dirazoh;
frouez an douar ha frouez labour mab-den
a zeuio da veza evidom ar bara a vuez.

R- Bennoz da Zoue, bremañ ha da viken !

A vouez izel, en eur lakad dour er gwin:

Dre zakramant an dour hag ar gwin-mañ,
ra vo kresket ennom buez an Doue
a zo bet teurvezet gantañ kemer on natur-den.

+ war ar gwin: Bennoz deoh, Aotrou Doue, mestr ar bed,
rag euz ho madelez on-eus bet ar gwin-mañ
a lakom dirazoh;
frouez ar vinienn ha frouez labour mab-den
a zeuio da veza evidom evaj santel an eme.

R- Bennoz da Zoue, bremañ ha da viken !

- + a vouez izel: Izel dirazoh, aotrou, ha glaharet or halon,
ve houlennom digemer mad diganeoh;
or zakrifis hirio ra blijo deoh, Aotrou Doue.
- + E korn an aoter, ar beleg a walh e zaouarn hag a lavar a vouez izel:
Ma gwalhit, aotrou Doue, euz va fehejou,
ha lakit glan va ene.
- + Distroet da greiz an aoter, e houlenn ma vo an oll unenet o pedi:
Pedom oll, va breudeur, ma plijo da Zoue an Tad
ar zakrifis ez eom da ginnig.

ar bobl a respont:

Evid gloar Doue ha silvidigez ar bed.

N° 26. WAR AR PROVOU

- 1- En eur ginnig deoh, Aotrou, ar zakrifis-mañ
evid silvidigez ho servicher (servichêrêz) A
en em erbedom ouz ho trugarez;
peogwir e-neus kredet
ez eo ho Mab eur Zalver leun a vadelez
ra vo ivez evitañ eur barner leun a drugarez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen;
- 2- Aotrou Doue, leun a vadelez,
bezit truez ouz an hini a zo o paouez mervel;
evitañ eo e kinnigom ar zakrifis a ro ar peoh.
Mar deo bet taget gand ar pehed
pe gontammet gand sempladurez e natur a zen,
plijet ganeoh, en ho karantez,
e hlannaad hag e bardoni.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.
- 3- Aotrou Doue, oll-halloudeg,
bezit truez ouz ene ho servicher (servichêrêz) A.
a ginnigom deoh evitañ (eviti) gand eur galon izel,
ar zakrifis-mañ a veuleudi.
Ra zeuy ar brovadenn-mañ a beoh hag a bardon,
da dalvezoud dezañ ar repoaz vad peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. Amen.
- 4- Selaouit, Aotrou Doue, ouz ar bedenn a gasom davedoh
evid ho servicher (servichêrêz) A.
Roit dezañ (dezi) ar zilvidigez
diwar ar zakrifis a ginnigom deoh,
peogwir eo felllet ganeoh e ve pardonet
pehejou ar bed a-bez dre ar zakrifis-mañ.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. Amen.

5- Aotrou Doue, dre ar zakrifis-mañ
 ha n'eus nemetañ hag a hellfe dilam ar pehejou,
 ni a zeu d'ho pedi.
 Deuit da walhi a beb pehed
 ene ho servicher (servichêrêz) A.
 Grit ma teuy ar brovadenn-mañ evid ar pehed
 da dalvezoud dezaf(dezi) ho trugarez da virviken.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

6- (en amzer Fask)

Ra blijñ deph, Aotrou Doue,
 ar brovadenn a ginnigom deoh
 evid ho servicher (servichêrêz) A.
 Grit ma vo degemeret e gloar an neñv
 da heul Jezuz, ho Mab keret
 a hellom bremañ dija en em unani gantañ
 o lidañ mister ho karantez.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

7- (evid meur a hini)

Aotrou Doue, dond a reom d'ho pedi;
 Taolit eur zell a vadelez war ar provoñ-mañ.
 Peogwir e teom d'ho hinnig evid A. hag A. ho servicherien,
 roit dezo ar pare a zeu euz an neñv
 hag an diskuit en ho karantez.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

8-(evid meur a hini)

Aotrou Doue, leun a drugarez,
 resevit or pedennou, dacust d'an dister ma 'z int,
 ha dre ar misteriou a ro deom ar zilvidigez,
 roit d'or breudeur (mignoned, madoberourien),
 int hag ho-prus roet dezo ar hras
 da ziskleria o feiz ennoh,
 ar pardon eus o oll behejou.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

Nº 27

P R E F A S O U

Prefas an Anaon - I

An AotrouDOUE ganeoh. R/ ha gand ho spered.
 Ho kalon d'an uhel. R/ Troet eo warzu ennoh.
 Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou. R/ Just ha santel eo.

E gvirionez, just ha santel eo
 ho trugarekaat e peb let hag e peb amzer
 c'hwil, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

Eñ e-neus laket da bara dirazom
 an esperañs da zevel en-dro beo hag eürus ;
 ha dre-ze, ma'z eo tenn rañkoud mervel,
 ez om frealzet gand ar bromesa da veva divarvel.
 Rag, evid ho tud fidel, Aotrou Doue,
 ar vuez, pell diouz beza kollet, a dro d'eur vuez welloc;
 ha, pa vez echu o demeurañs er bed-mañ,
 e kavont unan peurbaduz er baradoz.
 Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll zent,
 e savom or mouez da veuli ho kloar,
 en eur lavared a greiz kalon:

Santel, Santel, Santel an Aotrou Doue, Mestr ar Bed.
 Ieun eo gand ho kloar an neñv hag an douar.
 Hozanna e barr an neñvou.
 Benniget an hini a zeu en ano Doue.
 Hozanna e barr an neñvou.

(Marrec-Nº 184)

Prefas II.

E gwirionez Dre Jezuz Krist, or Zalver.

Eñ hag e-neus asantet mervel, unan evid an oll,
 d'on diframma oll eur galloud ar maro.
 Eñ hag e-neus gouzañvet ar maro
 evid ma hellfen beva evidoh da virviken.

Setu perag, a-unan gand an Elez
 e tisklerom ho meuleudi gand levenez.

Santel.....

Prefas III.

E gwirionez.... dre Jezuz Krist, or Zalver.

Rag eñ eo silvidigez ar bed ayebez,
 buez an dud hag adsao ar re varo da veo.
 Drezañ ema armeou an Elez oh adori ho meurbéd,
 dirazoh, en eur mor a levenez peurbaduz.
 Or lezit, ni ho ped, da gannesk ganto or moueziou
 ha da gana da viken ho meuleudi.

Santel.....

Prefas IV.

E gwirionez, just ha santel eo
 ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer
 c'hwiti Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

c'hwi ho-peus greet deom dond er bed
 c'hwi a ren ar vuez,
 c'hwi a fell ganeoh e vefem, er bed-mañ dija,
 dilivret diouz galloud an droug.
 ni hag a zo bet tennet euz an douar.

ya, dasprenet om bremañ dre varo ho Mab
 hag o hortoz emañ eur zin euz ho perz
 d'or galver d'ar wir vuez e gloar an adsao da veo.

Santel.....

Prefas V.

E gwirionez... Doue oll-halloudeg ha peurbadel.
 Daoust ma'z eo just e vefe mab-den tonket da vervel,
 pa zeu ar maro d'or skei evel kastiz d'or pehejou
 ho kalon a dad a zeu d'or zavetei
 dre an treh deuet gand ar Hrist
 Eñ hag or galv da adveva gantañ da viken.

Santel.....

N° 28

PEDENN VEUR II

E gwirionez, c'hwi 'zo santel, Aotrou Doue,
 hag ahanch e teu peb santelez.
 Plijet ganeoh eta santellaad ar provoù-mañ,
 dre nerz ho Spered Glan;
 ma teuint da veza evidom korv + ha gwad or zalver Jezuz Krist
 En noz ma oa gwerzet, ha m'en em ginnige deoh
 evid gouzañv e basion, Jezuz a gemeras bara,
 ha, goude beza rentet deoh bennoz ha trugarez,
 e-dorras hag hen roas d'e ziskibien,
 en eur lavared:

"Kemerit oll, ha debrit euz hemañ,
 rag va horv eo, roet evidoh."

Evelse c'hoaz, goude koan,
 e kemeras ar halirad gwin,
 e rentas deoh adarre bennoz ha trugarez,
 hag hen roas d'e ziskibien, en eur lavared:

" Kemerit oll, hag evit euz ar halirad-mañ,
rag va gwad eo,
gwad an emgleo nevez ha peurbaduz,
a vo skuillet evidoh hag evid an oll dud,
da bardoni ar pehejou.

C'hwi 'raio kement-mañ gand ar zoñj ahanon."

+ar beleg: Braz eo mister ar feiz
ar bobl: Hi a embann ho maro, aotrou Krist;
lida reom boh adsao da veo
en eur hedol ma teuoh en-dro.

+ar beleg: Bewech ma tebrom ar bara-mañ
ha ma'h evom ar halirad-mañ
e lidom mister ar feiz.

ar bobl: Digas a reom da zoñj euz ho maro,
aotrou Krist savet da veo,
ha gedal a reom ho tistro.

+ar beleg: Embannom mister ar feiz.
ar bobl: Gloar deoh-c'hwi hag a zo bet marvet,
Gloar deoh-c'hwi savet da veo,
c'hwi, or zalver hag or Doue,
deuit, salver Jezuz.

Gand ar zoñj eta euz or zalver maro evidom,
ha savet euz ar bez leun a vuez,
e kinnigom deoh, aotrou Doue,
bara ar vuez ha kalirad ar zilvidigez,
gand or brasa trugarez evid an digemer a rit deom amañ
hag an eurvad da helloud kinnig deoh an overenn.

Gand eur galon izel, e reom ouzoh ar bedenn-mañ:
pa gemerim bremaig korv ha gwad or Zalver,
ra vezim unanet kenetreom dre ar Spered Santel.

Ho-pet soñj, aotrou Doue
euz hoh iliz, skignet dre ar bed a-bez:
Grit ma kresko en ho karantez,
a-unan gand on Tad Santel ar Pab, N.....
on aotrou 'n Eskob, N.....
ha kement hini e-neus karg euz ho pobl.

Ho-pet soñj euz ho servicher, N.....
ho-peus galvet euz ar bed-mañ davedoh:
peogwir eo bet unanet gand or zalver, ho mab,
bet heñvel outañ o tremen dre ar maro,
grit ma vo par dezañ ivez
o sevel euz a varo da veo.

Warnom -ni- ivez, plijet ganeoh skuill ho madelez,
ma hellim kaoud perz er vuez peurbaduz,
a-unan gand ar werhez gloriuz Vari, mamm da Zoue,
gand an Ebestel eüruz hag an oll Zent euz peb amzer,
ha renta deoh da viken gloar ha meuleudi
dre Jezuz Krist, ho mab karet.

A zo dreizañ, ha gantañ, hag ennañ,
deoh-c'hwi, Doue an Tad oll-halloudeg,
a-unan gand ar Spered Glan,
peb gloar ha peb enor, a oll-viskoaz da virviken. AMEN !

N° 29.

PEDENNOU EVID TRUGAREKAAD DOUE

Araog ar Zater

Neuludi ha bennoz a lavarom deoh, Tad Santel
a-berz ar re 'zo amañ
hag a-berz ar re 'zo eet d'ar bed all.
Rag plijet eo ganeoh e teufe hennez end-eeun
hag e-neus or huiteet
d'or boda hirio er garantez.

Eet e oam, peb-hini diouz e du, war hol labour,
sammet gand or buez pemdezieg,
ha setu m'on-eus lezet peb tra a-gostez
evid digeri or halon, a-unan ganeoh, da boan ar re all.

Soñj a zeu deom e-neus ho mab Jezuz Krist,
dre e varo war ar groaz,
sammet ar boan a gaver o veza an-unan
e kement ha kement a zoare;
ha bremañ dre e vuez treh d'ar maro
eh asur deom e vevim.

Setu perag gand ar re oll a zo bet en on raog
hag a zo beo ganeoh,
ar re on-eus anavezet
hag a wel bremañ ho tremm,
gand oll zent an neñvou,
evel breudeur unanet m'ho ped:

On Tad hag a zo en neñv....

2

Neuludi ha bennoz a lavarom deoh, Tad Santel,
ho karantez he deus roet deom ar hras
da weled en eun doare nevez an amzer dremenet.
Talvoudusoc'h ha kaerroc'h e kavom bremañ
ar bloaveziou eet e-biou.
Fiskuez a reont sklêr ez oh bet ganeom en or buez.

En ho mab, Jezuz Krist, raro hag adsavet da veo
or-eus an asurañs, bremañ dija,
ez eo taolet d'an traon kement on disparti:
roger or pehejou, taol ar maro, pouez or poaniou.

Setu perag, pa vez beo ho karantez en or halonou
e teu liammou nevez d'o unani;
Peogwir ez oh beo, ni ivez a adsavo da veo.

Sacket gand ar re ar zo bet war an douar en or raog
 hag a zo beo ganeoh hag ennoh
 a-unan gand oll zent an neñvou,
 evel breudeur unanet e kredom lavared.

On Tad hag a zo en neñv.....

lid ar gomunion

an oll a-unan On Tad hag a zo en neñv,
 hoh ano bezet santelleet,
 ho rouantelezh deuet deom,
 ho polontez bezet grêt
 war an douar evel en neñv.

Roit deom hirio
 or bara pemdezleg.
 Pardonit deom or pehejou,
 evel ma pardonom
 d'ar re o deus market ouzom.
 Ha n'on lezit ket
 da goueza en tentadur, med
 on diwallit diouz an droug

ar beleg On dizammit, aotrou Doue, diouz peb droug,
 ha plijet ganeoh rei deom ar peoh en on amzer,
 ma vim bepred, dre ho madelezh,
 distag diouz ar pehed
 ha diwallet diouz an oll drubuilhou,
 da hortoz an eürusted a esperom
 ha distro or zalver Jezuz Krist.

an oll Dech ar rouantelezh, aotrou Doue,
 dech peb gloar ha peb galloud da virviken !

ar beleg Salver Jezuz Krist, c'hwil ho peus
 lavaret d'hoh ebestel:
 "Ar peoh a lezan ganeoh, va feoh a roan deoh."
 na zellit ket ouz or pehejou, med ouz feiz hoh iliz,
 ha plijet ganeoh, hervez ho polontez,
 he lakad er peoh hag heh unani: c'hwil an Doue beo
 ha leun a hloar a oll-viskcoaz da virviken.

AMEN !

° Peoh or zalver ra vo bepred ganeoh.
 R Ha gand ho spered.

Ma'z eus tu d'hen ober, ar beleg a lavar d'an dud:

Kinnigit ar peoh an eil d'egile.

A vouez izel, pa'neus torret ar bara ha laket eun tamm er halir:

Korv ha gwad or zalver Jezuz Krist, unanet er halir-mañ,
 ra vezint magadur deom evid ar vuez peurbaduz.

Epad ma ra ar beleg kement-se, e vez kanet pe lavaret:

Oan Doue, a zilam pehed ar bed, ho pet truez ouzom.
 Oan Doue, a zilam pehed ar bed, ho pet truez ouzom.
 Oan Doue, a zilam pehed ar bed, roit deom ar peoh.

A vouez izel, ar beleg a lavar unan euz an diou bedenn-mañ :

- Salver Jezuz krist, mab an Doue beo, evid ober bolontez ho Tad ha gand nerz ar Spered Santel, ho peus, dre ho maro, roet ar vuez d'an dud; dre ho korv hag ho kwad santel, me ho ped, va dizammit euz va oll fehejou hag euz peb droug, ha grit din chom stag bepred ouz ho lezenn, heb beza morse dispartiet diouzh.
- Jezuz Krist, va zalver, pa'z an da gemer ho korv hag ho kwad, mirit na drofe ar gomunion-mañ d'am barn ha d'am hondaoni ; med, ablamour da garantez ho kalon, grit ma talvezo d'am diwall ha d'am farea korv hag ehe.

Â-BARZ KOMUNIA; ar beleg a zav en osti da ziskouez d'an dud fidel:

- ar beleg: Eürus ar re'zo pedet ouz taol or zalver !
Setu Oan Doue, an Hiri a zilam pehed ar bed.
- an oll: Va Doue, n'on ket din e teufeh beteg ennon,
med lavarit eur ger hebken, hag e vin pareet.
- ar beleg d'en em gomunia: -Korv or Zalver d'am diwall evid ar vuez
-Gwad or Zalver d'am diwall evid ar vuez peurbaduz.
- da gomunia an dud fidel: Korv or Zalver. AMEN !

Nº 30.

KAN D' AR GOMUNION

1. (Filip. 3/ 20-21)

Gortoz a reom da zond, evel Salver, Jezuz Krist, on Aotrou.
 Hê a jenncho doare d'or horvou dister
 hag o lako par d'e gorr gloriuz.

2. Lakit da skedi, Aotrou, war or breudeur, ho sklerijenn beurbaduz; m'o-dezo perz en ho levenez e kompagnunez ar zent. Rag c'hwi 'zo madelezuz.

3. (Epad an amzer-Fask. Yann II/25-26)

Me eo an adsao da veo hag ar vuez, eme an Aotrou
 An neb e-neus feiz ennon ha goude ma ve marvet a vevo;
 ha kement hini a vev gand feiz ennon
 ne varvo ket da viken.

N° 31

AR BEDENN GOUDE AR GOMUNION

1. Aotrou Doue, gand sakrifis e gorr hag e wad
 e-neus ho Mab roet deom
 ar bevañs on-eus ezomm evid mond beteg ennon;
 Ra da'vezao an overenn-mañ d'or breur (d'or c'hoar)
 da erruoud beteg an daol pourchaset en ho paradoz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

2. Aotrou Doue, c'hwi hag a zo treh d'ar maro
 ho pedi a reom evid A. nevez eet euz ar bed-mañ;
 Grit dezañ, gwalhet gand an overenn-mañ
 ha dieubet diouz e behejou,
 kacud perz en eürusted an adsao da veo, da viken.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

3. Aotrou Doue, en overenn-mañ
 on-eus lidet, evid A. mister ar Pask.
 Grit dezañ (dezi) tremen euz ar bed-mañ
 beteg ho temeurañs a beoh hag a sklerijenn.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

4. (Evid meur a hini)

Doue madelezuz meurbed
 resevet on-eus diganech sakramant ar zilvidigez
 hag e teuom c'hoaz d'ho pedi:
 Ra vo evid peb-hini ahanom
 nerz-kalon e peb amzer
 hag evid ar re o-deus kuiteet ar bed-mañ
 eur vammenn bepred beo a bardon.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

N° 32.

LID DA GLOZA

Ar beleg: An Aotrou Doue ganeoh.

R./ Ha gand ho spered.

Doue oll-halloudeg d'ho penniga,
 An Tad, ar Mab, hag ar
 Spered Santel.

R./ AMEN !

It e peoh or Zalver !

R./ Bennoz da Zoue !